

Stéréden ar Fleurenou

Cette "stéreden" était Marie QUEMENER
euz Keranguitton, devenue plus tard
femme Le MEUR de Kerherve
(Pont Melvez)

*Marie Quemener euz Keranguitton
fe c'heññer a Kerherve*

— I —

Vel an douar dont an drô, ar mor da valoti,
Ma spéret da labourad néquet vit arréti ;
An dé a surtout a noz charmet vé ma sonjou
A Klévet nomp hun véal musique Ker a rimou !

— II —

Inspired gant Apollon doué a rimérien,
A meuz composed eur sône évit ar ganérien,
A ré blich dè frédoni pé vé iè o c'halon
A condui an dansou pé vé occasion.

— III —

Credan ket vé mant muoh dign da vein célebred,
Vit charmou eur plah youanc a meuz bed remarqued ;
Téflout ran neb neuz gout évit ar coantiri,
Da drémen tal i h'chen a hep ih remarqui !

— IV —

Tout i horf a zô tailléd barz ar perfectiôn,
Ag i t'zroad zô ken bian vel hini Cendrillon !
War c'hampagn véquet gwellet eun éléganç ken rar,
Jonjet ma wa returned Vénus war an douar !

— V —

Juget ma difa spéret a nomp wellet i zal,
I daoulagad douç a franc zô pur vel eur c'hristal,
Réi a reight da zouhaiti nomp zélat diunté
Peneuz na gléfè an dour dont jamaiz a warné.

— VI —

Barz a nuanç a blich di deuz eur pennat blèv fin
I bègu a zô adorabl pé distanc da houezin ;
A crôhen douç i diw chôd neuz eur liv ken téner
Evel déiou eur fleuren barz a névez amzer !

— VII —

Eun éléganç naturel a deuz da nomp zouguen
Kencoulz pé vé a tansal vel pé vé a pourmen
Ag a skeut difè jamaiz a n'air da vein génet
Lak a réal an drô déi da nomp zantout eizet.

— VIII —

Barz ar broiou gant ar yaoul pad ar blav dizéhed,
Meuz bed gwellet merhed coant : Juivet a mauresque,
Gwellet a meuz ré ardent deuz a n'Andalouzi.
Deunté tout na meuz kavet muoh temptus a hi !

— IX —

Zur wah a hep i gwellet, hanvé fen anèzi,
Dré ih moez harmonius pé vé a raisoni.
Contus wah, a hep bein ré, i c'honversaçon,
Zô vit coz, coulz a youanc eur régalaçon

— X —

Barz ma mémoir chômô hoaz deunti eur vision
Evel deuz eur plah gentil a ténér a c'halon ;
Partout lah a nomp présent deuz a n'ol agréabl...
[Eur coantiri méprizus na néquet estimabl !]

— XI —

Eur podt youanc a halô gonit i faveuriou,
Névô bed eur stéréden war a n'ol fleurenou,
Trô eur lèv anter pé diw, pé matrèzen ar spen
E nomp gómer Parc-ar-Mest évit créis an dachen !

— XII —

Calz a dud a hoantavo goufet piv é hônez,
Met o amzer a colonth, zé n'oufènt jamaiz ;
Zé a chomo eur sécret vit a n'ol coulz a hi
Kar n'oulfen vit priz a bed froissè ih modesti.

— XIII —

Mar d'zichanç déi lenn ma sône pé tramet i c'hlével,
Kavi zur na sonjo ket a hé vité é gret,
Kar i c'haractère zo rez a hep prétençon,
Néquet vel calz corompéd gant ar n'ambiçon.

— XIV —

Lib a ver da lavaret peneuz a hout galant,
Vit reinti déi hep a war eun n'homage éclatant.
Vit ma p'faie a déclaran mé nebeut exigenc,
Eur blijadur di dépign vo tout n'récompenc !

— XV —

A neuzen, honz goudé tout, matrèzen na néquet,
Met eur jonj éblouissant barz ma fen tréménet...
Eun digaré da laret neuz mant ken adorabl
Vel eur plah intelligent mar vé coant ag aimabi !

?

G. ALLAIN,

Barde Parcelle-ar-Hoat